

Skol-Uhel Silieg : Ur skol evit un diorren padus ha kenskoazell e Breizh

Pell zo dija e vez displeget gant tud zo emañ mab-den o vont war un hent-dall, en ur vevañ en ur mod ma ne vo ket moien padout gantañ : ar blanedenn ne bado ket, ha ni da heul. An diouganourien-se zo bet graet goap outo alies, pe z'eus bet sellet outo evel ouzh tud trist a spered. An deiz-a-hiriv p'eo deuet da vezañ anat, splann, prouet hag adprouet gant ar skiantourien e oa ar gwir ganto, ne c'heller ket mui serriñ an daoulagad : kemm mod bevañ a ranker ober, hag an holl a rank ober. Un enkadenn vras a zo dirazomp, un enkadenn ekonomikel sokial ha sevenadurel da heul ar c'hemm a c'houzañvo hon endro, peogwir emamp-ni un tamm eus an endro-se pezh n'hon eus ket komprenet atav ! Ha seul brimoc'h, seul niverusoc'h e vimp o cheñch penn d'ar vazh, seul skañvoc'h vo an enkadenn-se. **Da lâret eo e teuio an diskoulm dre ar c'henskoazell etre an dud, pe ne deuo ket !**



Padal e kred lod ober van pas kompren, pe soñjal e raio ar re-all, en o flas. Ha gwasoc'h zo : **lod a implij ar gerioù burzhudus « en-dro », « diorren padus », ha ne reont netra da wellaat ar bed, nemet implijout ur « c'hizh glas » evit kenderc'hel da werzhañ evel araok**, hep teurel evezh eus pezh vez produet, hag e-peseurt mod e vez graet... O welet kement-se e c'hell bezañ kollet an dud, piv krediñ pa c'heller lavarout forz petra dre ar vruderezh ? Perak ober strivoù pa ne vez ket graet gant ar re all ? Peadra da fallgaloniñ... o soñjal emamp o vont war gil ha n'eus seurt-ebet d'ober...

Evit klask talañ ouzh an dro-spered negativel-se, evit klask kompren an enebiezh sosiopsikologel, ekonomikel ha politikel a c'hellfe mirout ouzomp da saveteiñ hor blanedenn, evit reiñ ur chañs bennak d'ar wirionez hag d'ar furnez da vout trec'h, o deus divizet un nebeut Breizhiz krouiñ ul lec'h da eskemm, da gelaouiñ, da brederiañ. D'hor soñj hon eus ezhomm niholl ul lec'h d'en em adkavout evit tabutal hag en em galonekaat an eil-re ar re-all. Evit bout kreñvoc'h hag efedusoc'h evit an dazont evit hor bro hag hor bugale.

E-kreiz Breizh zo ur gumun vihan he deus kroget d'ober he lodenn eus al labour-kemm... Ha peogwir emañ e-kreizig-kreiz ar vro evel ur galon (ar galon hon eus ezhomm da vout kalonek), e kinnigomp deoc'h en em adkavout a wech an amzer e **Silieg**, e Kreizenn vakañsoù Krenihuel, ar greizenn ekologel kentañ bet savet e Bro C'Hall. **Ul lec'h brav ha sioul evit kas hor preder warraok holl asambles, gant an holl dud a-youl-vat.**